



CANTIQ

VOAR MISSION PLOUARET.

Voar eun ton anavezet.

SPERET divin, lagad Doue,
Inspirit en ho pugale
Da zont gant soign ha dilijanç
Da admira ar Brovidanç.



An tad a gonsolation
A zigas deomp ar mission
Ebars e paros Plouaret.
Da glasq an dénved egaret.



Medecinet an eneou,
Baleet jardinou an Aotrou.
Clesqet al louzou convenabl.
Seis clénvet oc'h eus voellat.



Aotrou, digorit ho percher.

Israël e deveus mizer ;
 Clàn eo ar bobl gant al lournach,
 Qen e vo trempet en ho craç.



Dre eur speret a vedizañ,
 Orgouil, avariç, neglijañ,
 O deus tarchet hon eneou,
 O redeg voar lerc'h ar maro.



Hirie e tisqen eus an eê
 Sourcen ar c'hraç, dour ar vue :
 Mar gellomp cavet un daqen,
 Vezomp grêt yac'h eus ar vocen.



Malheur d'an den a vo hardi
 Da gemer, hep en em voalc'hi,
 Eus an dour sacr ha precius
 Sortiet a galon Jesus.



Goell e ve mil goech coll ar bed,
 Erve souten an doctoret,
 Evit dont eur c'htisten dre arach,
 Da gometti eur sacrilach.



Eun exempl d'ar benitantet :

Brec'h Osa a zo dizec'het
 O tont da douch dre imprudanç
 An dorn eus an arc'h alianç.



Ni gleo morzol ar goncianç
 O sqei var dor an neglijanç ;
 Ni o supli, Speret-Santel,
 Chomit geneomp bete mervel.



Ha c'houi, pastoret venerabl ;
 Digassit deomp, abers hon tad ;
 Qemeret eus a zorn Doue
 Eur prezant caër d'e vugale.



Deut da rei deomp eur binijen ;
 Da esperi an absolven,
 Pa bromet heritour Sant Per
 Pardon hag induljanç plenier.



Me o supli, penitantet,
 Pa zeot e berret Plouaret,
 Da zaludi a vir galon
 Croas precius ar mission.



Honnes hon eus bet-vit h

Digant hon tadou pastoret,
 Hag a zo precius meurbet,
 Emàn enni Salver ar bed.



Sel outàn-ta, pec'her ingrat,
 Gouliet e zeo pen ha troad,
 Corf Jesus-Christ, hor guir Aotrou,
 Sivoas gant hon oll pechejou.



Sonjomp, pec'herien diræzon,
 Pegen qer eo bet hor rançon
 Da Jesus-Christ, Salver ar bed,
 Zo evidomp oll crucifiet.



Consider-ta, pec'her ingrat,
 Gneta a gle da zaoulagad;
 Ha te, pechezez milliget,
 Lavar adieu da bep pechet.



Consideromp er garante
 A Jesus-Christ, guir vab Doue;
 Deut eo da rei deomp hor pardon,
 Mar er goulennomp a vir galon.




Na gredomp ve ini abet

Ebars en paros Plouaret
 En defe lest hep profitàn
 Demeus eur c'hrac evel oumàn.

*

Ar baroziou-all divar dro
 Zo deut ive d'ar remejou ;
 Graç deoc'h oll da veza profitet ;
 Ma'n em velfomp er joaüsted.

F I N.



CANTIQU AN AVE, MARIA.

Var an ton ordinal.

*

ME o salud, Mari, gant respect,
 Merc'h da Zoue oll-galloudeg,
 Crouet gant Tad Eternel,
 Evit anjandri e vugel.

*

Mari, c'houi a zo beniget,

Mam d'an eil ferson an Drindet,
 Meritet oc'h eus an henor
 Laqât er bed hor Redemptor.



Mari, tenzor ar bobl fidel,
 Ha pried d'ar Speret-Santel,
 C'houi eo ar froezen a vue,
 Profetizet da bobl Doue.



Guerc'hez, mam douç ha mam dener,
 Sellit en draouyen a vizer;
 Ni zo accablet nos ha de
 Gant adversourien hon ene.



Alc'huez tenzor graçou Doue,
 Grit ma vezimp ho pugale,
 Rac adre ho touarn, Mari,
 Biscoas n'en deus collet ini.

F I N.



CANTIQ NEVEZ

EVIT AR ZALUT.

Voar an ton latin : Venite, adoremus.



CHRISTENIEN, pobl evrus, guir vugale da Jesus,
Deut... adoret ho mestr carantezus;
En envou hon roue hag hini an ælez :
Adoromp-en a galon, (2 vech.)
Adoromp-ën gant guir devotion.



Jesus a zo prezant er Zacramant-santel,
Jesus a zo mab d'an Tad Eternel;
Jesus, mab da Vari, ni a deu d'oc'h adori:
Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)
Ni oc'h ador gant guir devotion.



O pebes carantez oc'h eus, Salver ar bed,
Da chom ganemp en hosti consacret
Evidomp bemde da vezur hon ene!
Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)

Ni oc'h ador gant guir devotion.



Prosternet d'an douar dirag ho Majeste,
Ni oc'h ador, Jesus, guir vab Doue:
Roit deomp, ni o ped, ho penediction.

Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)
Ni oc'h ador gant guir devotion.



Ælez demeus an eê, oll sperejou evrus,
Canomp-ni oll melodi da Jesus,
Ar GLORIA IN EXCELSIS DEO.

Meulomp Doue assambles, (2 vech.)
Meulomp Doue bremàn ha da james.

A M E N.

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.